

CANTIK EN ENOR SANT MATTHURIN

O va Doue, o va Doue !
Peguen trist eo stad an ene
A gouez e tan ar Purcator
Ha da vont kuit ne gav digor !

DISKAN.

Sant Matthurin, ken truezus
Ouz an anaon hirvoudus ;
Sant Matthurin, n'hon lezit ket
Pel en tan da veza devet.

Hag gouscoude piou an hini
Na iel ket, siouas ! da zevi
Piou vo salvet eb mont en tan ?
Var gant ne vezo ket unan.

Enn anaon pel diouz ho bro,
An esperanç n'eo ket maro ;
Pignat a raint d'ar Barados,
Mæs er poaniou red eo gortos.

Ma neuz sicour, red vo paea
Beteg an diner diveza :
Netra impur n'ello sevel
Varzu hor mestr teir guech santel.

Eneou paour, var ar glaou ruz
C'hui a c'houzaon sec'het spontus ;
Digant ho tud, c'hui a c'houlén
Eur berad dour hag eur beden.

Hag an dud-ze ho peuz caret,
Ho mab, ho merch hag ho pried,
Ho lez duhont da hirvoudi
Da drei en tan ha da zistrei.

M'ho deuz cals tud calonou mein,
Douz eo calon Sant Matthurin :
Sant Matthurin a zelviro
An nep gant fizianz er pedo.

Hen oar caret an anaon,
Bemdez e tenn euz ho frizon,
Bemdez e tenn cals eneou.....
Gantan e nijont d'an envou.

Bezit devot en e genver,
Savit dezhan eun Ilis kaer,
Roi d'an Ilis, d'ho Sant ive,
A dal ouspenn prena leve.

VU ET PERMIS D'IMPRIMER :

Quimper, le 22 Mai 1876,

J. JÉGOU, vic. gén.

Quimper, typ. Ar. de Kerangal.